



# Ar Vartolodet



DISKAN :

*Setu aze ar vartolodet !  
Karet a rent ho micher,  
Ha kaout rent ho amzer ber.  
Gant netra ne hellont be spountet !  
Partout ven recevet mad,  
Henoriou herves ho stad.  
Ho speret hel beza tourmantet  
Gant eur plach neus dezo plijet,  
Mes kaout e rent ato ar vozen  
Da gonzoli ho anken ;  
Eirus vezont pen da ben !*

1

Pa vezer martolod,  
Ver ato var an od  
O pourmen etro ar bed.  
Chenchamant zo bepred ;  
Boezet eon deus ar mor bras,  
E zangeriou siouas !  
Gant e yaouankis fougus,  
Ema ingal nersus  
Evit stourm digant couraj.  
Ne spered ma imaj  
E vestres muia karet,  
Ne vro e maï chomet.

2

Pebes kaëra micher  
Da ober e affer,  
Peguir e ia eun tamik  
Dre ar bed gav plahik  
Garo eun devez pe zaou !  
Eirus e ven o daou,  
Ber vezo an amzer ;  
Hi renko chom ne c'her  
Lech heman iaï da lech al,  
Evit klask eur chans al.  
Peurvuia e kavo  
Eirusted e peb bro

3

Gueled raï keriou bras,  
Ha pegument draou c'hoas !  
Bep seurt penvédiguessiou  
E kaver er broiou ;  
Kleou raï bep seurt langachou,  
Guel raï tud bep seurt liou.  
Veler ket alies  
Ken founus raï eur vestres,  
Ru pe zu pe melen,  
Mod ma lakaï ne ben.  
Guis re al vo gret dezi  
Daou zevez garo anezi.

**François BENOIT**